

Degaset ganeoc'h

un
tog
heol

Treuswiskamanchoù

ur
chupenn
c'hlav

ur sac'h-
kousket

un deltenn evit ar
re vrasañ

dilhad
kouronkañ

boutoù
sport

Berr-ha-berr

Degemeret e vez bugale e staj KEAV. Ne vez ket degemeret bugale a vefe o-unan avat : graet e vez war-dro bugale ar stajidi e-pad ar c'hentelioù.


Degemeret e vez ar vugale a zo etre 6 vloaz ha 14 vloaz en ur greizenn dudi a reont «kreizenn ar vugale» diouti. Digor eo ar greizenn dudi etre 9e ha 5e evit an obererezhioù gant un diwallerezh adalek 9e - ¼ ha betek 5e ¼ d'an noz. Evit pred kreisteiz e chom ar vugale dindan kiriegezh ar « greizenn » evit ma yafent war-raok gant ar brezhoneg ouzh taol ha krouiñ ur spered a-stroll etre ar vugale, hag etre ar vonitourien hag ar vugale. Da goan e c'hall ar vugale bezañ gant o zud da lakaat e pleustr ar pezh a zo bet desket ganto.

Mont e darempred

KEAV
(titouroù hollek, enskrivadurioù)
02 98 95 59 31 / keav@wanadoo.fr
2 hent Mouiouen – 2900 Kemper

KEAV evit ar vugale
(titouroù diwar-benn mont en-dro ar greizenn dudi)
kenurzhier.keav@orange.fr / 06 06 45 85 08

Graferezh : Gouzen Noleven



Un
endro
pinvidik

2016

Ur
greizenn
dudi

Brezhoneg
ha
plijadur

Ar raktres



Degemer ar vugale asambles gant o zud* evit kreñvaat al liammoù e brezhoneg en tiegezh a zo unan ouzh palioù KEAV.

Adalek 6 vloaz betek 14 vloaz eo degemeret ar vugale er greizenn.

Kampoù bihan, div nozvezh anezho, a vo kinniget d'ar vugale adalek 9 bloaz. Div nozvezh a dremenint dindan an deltenn.

Kinniget e vo oberennoù liesseurt a gloto gant oad ar vugale.

Hervez an niver a vugale e vo daou pe dri rummad bugale heñchet gant buhezourien stummet.

Pep tra a vo kaset en-dro e brezhoneg penn da benn.

Eus 9 eur mintin da 5 eur d'an abardaez e vo skipailh « KEAV evit ar vugale » e-karg (prantad merenn ivez).

Dindan giriegezh o zud e vo ar vugale ar peurrest eus an devezh ha pep hini a sento eveljust ouzh reolenn KEAV : « pep tra e brezhoneg » !

Aozet e vo an devezhioù ha kinniget an oberezhioù diouzh an tri fal pennañ :

- doujañ ouzh lusk ar vugale ;
- diorenn an emrenezh ;
- pinvidikaat an daremprediñ.

*Degemeret a raer bugale an dud a zo oc'h heuliañ skolañv KEAV

Hag ouzhpenn



Kampiñ

Sizhunn 1 : bugale eus 6 da 12 vloaz

War velo e yelo ar vugale vrasañ da gampiñ (div nozvezh). Mont a raint a-hed ar c'hanol. Kinniget e vo d'ar vugale adalek 9 bloaz.

Evit ar vihanañ e vo kinniget un nozvezh kampiñ e Kastellin (tost-tre eus ar greizenn).

Dafar da zegas :

- evit pep bugel :

ur sac'h-kousket, un deltenn ma'z eo posupl

- hag evit ar re adalek 9 bloaz :

pep a varc'h-houarn hag a dokarn, ma'z eo posupl

Degemeret e vo ar grennarded adalek ar 4re klas betek ar c'hlas termen er memes mare, er gevrenn « KEAV evit ar grennarded, Yezh ha Dudi ».

Sizhunn 2 : bugale eus 6 da 14 vloaz

Div nozvezh kampiñ a vo kinniget d'ar re vrasañ e

Lokorn e-kichen ur vilin. Kemer a raio perzh ar vugale e buhez ar c'hamp bihan (predoù, sevel an teltennoù, dibab ar c'hoarioù...). Kinniget e vo d'ar vugale adalek 9 bloaz.

Evit ar vihanañ e vo kinniget un nozvezh kampiñ e

Kastellin (tost-tre eus ar greizenn).

Dafar da zegas :

ur sac'h-kousket, un deltenn ma'z eo posupl

Degemeret e vo ar vugale dindan 6 vloaz gant tadig pe mammig er memes mare er rummad « Brezhoneg er familhoù ».

Priz ar staj

Bugale skol-vamm : 100€

Bugale kentañ derez ha skolajidi : hanter priz an dud gour ;

Liseidi : 200€ ;

Ne baeer ket evit an trede bugel ;

Un distaol a vo graet evit ar vugale o chom e Penn-ar-Bed, gant sikour Kuzul-Departamant 29 ;

Priz evit an dud gour : 270€ ;

Studerien amzer-leun ha tud dilabour 230€.

